

# Alan Stivell, Eil Lodenn An Ugent Wed Kantwed -

Warlec'h an dromatism-man, 'alec'h ar bresel-bed  
Un emsav new-flamm breman ba 'Breizh a so ganet  
An dispac'h a so fleunia dindan hon daoulagad  
Laka'n oll bobl da sonjal piw eo he ha p'lec'h 'ya  
Ganet eo bet hon dispac'h er bloazio hanterkant  
Ga'r bagado ha Kendalc'h kenta paz an emskiant  
Ganet eo an dispac'h-sen gant un dra 'rall ivez  
Ga'c'houstias ekonomek ha gant an M.O.B.  
Braset 'n eus an dispac'h-man 'el 'wrizienn ba'n douar  
'Pad ar bloazio triuigent ha deit da voud krev 'walc'h  
Gant Glenmor, ga'n U.D.B., ga'r bresel aljerien  
Gant taolio an F.L.B., gant emgann ar c'houerien  
Ur paz all so tremenet e miz "Mae soixante-huit"  
Hor stourm so bet kredaet, holl lentegezh 'so aet kuit  
Kudenno ekonomik, sosial ha politik  
'N eus lakaet 'n trao da virvi peplec'h barzh hor broig  
C'hoant 'm eus bet da skoazella ar bobl bet ma mager  
A' gwraet'm eus ewel tud all 'pezh 'oan barreg d'ober  
Ma n'eo ket bet kompren't mat gant 'n oll dud dre aman  
Ma sro dre an Olympia so bet'n taol braw'wid 'vro-man  
Sikolojek eo bet an dra-se 'wid lakaad 'yaouankiz  
Laosk ar balio 'wid 'fest-nos ha n'eo ket nemed ur c'hiz  
Ha memes an dud koshoc'h 'n'eus kollet o kompleks fall  
Ha komas 'ra da jojal int par da tudo all  
An dispac'h a so breman tuchantik 'vo trec'hus  
Ba'bloawezhio pewarugent to 'vo sewel ur bed erus.